

Gwerz Koz

Sant Ervoan.

GWERZ KOZ SANT ERVOAN

~~~~~  
*War an ton ordinal.*

~~~~~  
DISKAN

Otro Sant Ervoan, ni ho ped,
Er vue-man hon zikouret
Da heuilh erfad ho vertuio
Ha da vont eun de d'an Nenvo.

~~~~~  
Silaouet holl, braz ha bihan,  
Bue an Otro zant Ervoan,  
Bue zant Ervoan Helouri  
Ha, me ho ped, holl disket-hi.

## **E yaouankiz hag e studi**

Ervoan Helouri 'zo ganet  
En Kervarzin, ti binniget,  
Damdost d'ar ger a Landreger,  
Eur c'hart-lew pe war-dro deuz ker.

E dad, ganet er Vinihi,  
 A oa e hano Helouri,  
 E vamm oa Azo ar Genkiz,  
 O-daou fur ha nobl en peb giz.

A-rog ma oa Ervoan ganet,  
 D'e vamm Azo 'oe diskleriet  
 Penôz ar bugel a douge  
 A vije eur zant braz eun de.

Ha, pa oe ganet ar bugel,  
 E oe gwelet, hep dale pell,  
 E vije leun a zantelez ;  
 Diskoel 'rae kad kalz a furnez.

E vamm, pa oa en noad deuz-ze,  
 'Diskaz d'ean pidi Doue ;  
 Goude, 'roaz eur mestr d'ean  
 Evit diski lenn ha skrivan.

Lakat a rejont o bugel  
 Entre daouarn eur mestr zantel,  
 Yann a Gerc'hoz a Bleuvian  
 A diskaz al latin d'Ervoan.

Seul-vui 'kreske e ziskamant,  
 Soul-vui 'kreske furnez ar zant ;  
 Pa na vije gand e studi,  
 E vije kavet o pidi.

Pa oa a barzek vla noajet,  
 Da Bariz e c'hoantaz monet ;  
 Eno neuze 'vije kavet  
 Ar skolio ar muian brudet.

Eno 'oe gwelet o trec'hi  
 Ar re 'oa gant-an er studi,  
 Dre e zantelez o zrec'he  
 Ha dre e spered lemm ive.

Adaleg neuze e roe  
 An aluzen d'ar paour bemde,  
 Ar c'hig a vije reit d'ean  
 A gase da di 'r bevien glanv.

Neuze e rae gwelet ive  
 Pegen zantel oa e vue,  
 Na debre ket bara gwiniz,  
 'Med bara hey pe vara griz.

Gret gant-an e filosofi,  
 E tiskaz an teoloji,  
 Ha da bowar bla war-n-ugent  
 'Oa gwiek-braz, leun a skient.

'Vit diski lezenn an Iliz  
 E kwita ar ger a Bariz,  
 'Vit mont d'ar ger a Orleanz ;  
 'Lec'h ma oa tud disketan Franz.

Eno digand an doktored  
 E tiskaz lezenno ar bed,  
 'Vit gout an tu da varn dalc'h-mad  
 Eur prosez gant lealded mad.

Er ger-man e tilez a-grenn  
 Ar c'hik, ar gwin, dre binijenn,  
 Ouz e zec'hed dour a eve ;  
 'N em rei a rae holl da Zoue.

Studian a rae lezenn Doue.  
 Pidi 'rae ive kalz bemde,  
 Ouspenn, yan a rae bep gwener  
 'Vit enori marv hon Zalver.

Goud a rae penoz ar skient  
 N'hall ket hec'h-unan ober zent,  
 Mar na unaner, hep paouez,  
 An obero hag ar furnez.

**Sant Ervoan belek ha barner,  
 e vue zantel**

E studi gant-an achuet,  
 Da varner braz e oe laket,  
 Da varner-iliz en Raon  
 Gant Moriz an arc'hdiagon.

Eskob Treger nebeut goude,  
 Pa glevaz komz deuz e vue,  
 Hen pedaz da dont davet-an,  
 Rak e prize kalz anezan.

Ar zant gant sentidigez vraz  
 Ouz mouez e eskob a zentaz,  
 Ha pa oe d'e vro distroet,  
 'Oe gand e eskop beleget,

E eskob e lakaz raktal  
 Da varner, pe ofisial,  
 Er memez amzer e hanvez  
 Da berson en parrouz Tredrez.

Ha eiz vla goude kement-man  
 Oe roet Louanek d'ean,  
 Ar barrouz a oa leun neuze  
 A dud fall hag a wall-vue.

Med Zant Ervoan a gelennaz  
 Ar bobl-ze gant karante vraz,  
 O prezek, o katekizan,  
 E chenchaz krenn ar barrouz-man.

Pa oa barner ec'h alie,  
 Liez a wech dre drugare,  
 An daou du d'en em unvani,  
 Da chom en peuc'h hep prosedi.

Pa douge eur varnedigez  
 Ec'h heuilhe mad ar wirionez,  
 Rag barn a rae herve Doue  
 Hep zellet ouz nep digare.

Na oa ket hepken barner mad  
 Zant Ervoan 'oa c'hoaz avokad,  
 Kaoz ar bevien a zifenne  
 Hep goulen netra digant-e.

Mar boa hon zant barner gwirion,  
 'Oa ive beleg a galon ;  
 Na glaske nemet gloar Doue  
 Ha diski d'an holl hent an Ne,

Liez a wech e prezege  
 Betek peder gwech en eun de,  
 Ar Basion a brezegaz  
 Seiz gwech de eur gwener ar groaz.

N'eo ket hepken da Louanek  
 Pe da Dredez 'ie da brezek,  
 Med c'hoaz d'ar parroujo war-dro  
 Ha dre Vreiz en Eskoptio.

Ar c'hraz, dre e brezenno,  
 A ziskenne er c'halono :  
 D'ar gwasan pec'herien e rê  
 Distrei rak-tal war-zu Doue.

**E binijenno, e vuzudo hag e  
varo zantel**

O vont da brezek e kavaz  
Eur pont goloet gand dour braz,  
Hag an dour a stankaz a-grenn  
Evid e lezel da dremen.

Ken tener oa e garante  
Ma chome kollet en Doue,  
En iliz, en-pad e beden,  
Ha pa lare an oferen.

Glebian 'rae 'liez e zilhad  
Gand an daero 'n e zaoulagad,  
Pa vije 'c'h ober e beden  
A-rog laret an oferen.

Eur wech en-pad e oferen,  
E zo bet gwelet, ust d'e benn,  
Eur flammen-dan deuz an Nenvo  
Keit ha ma oat er goureo.

E di a oa ti ar bevien,  
 D'ê-holl e rae an aluzen,  
 O lojan rae hag o gwiski  
 Ha rei d'ê c'hoaz boed da dibri.

Eur wech e roaz d'ar bevien  
 E holl ed hep menel greunen,  
 Dre eur burzud e oe kavet  
 E c'hrignol kenkent leun a ed.

Eur wech-all zoken n'en devoa  
 Nemet eur gwennegad bara,  
 Ha sethu hen 'vont d'hen rannan  
 Hep miret tamm ebet 'vit-an.

Ha goude m' an nevoa roet  
 E damm da bep paour 'vit e bred,  
 E vanaz e vara gant-an  
 Kement evel 'rog e droc'han.

Tud piz distroet ouz Doue,  
 Euz ar paour kemeret true :  
 Doue ive 'vo truezuz  
 Ouz-oc'h mar goc'h madelezuz.

Hen 'oa tad an emzivadad,  
 Difenner an intanvezed,  
 Skoazel an holl dud ezommuz  
 Ha kennerz ar re hirvouduz.

Ar zant, ken mad 'vit peb-unan,  
 A oa rust out-an e-unan,  
 E gorf a gastie bemde,  
 'Vel eun enebour e zelle.

War e gorf zantel e touge  
 Eur roched reun dalc'hmad, noz-de,  
 E wele oa 'n tamm plouz hepken  
 Gand ar bibl zakr dindan e benn.

Bemde rekiz 'n em skourjeze  
 Ha 'gozik-bemde e yune,  
 Amzer e gousket a oa berr,  
 Hag e vevanz o oa dister.

D'an divez, ar zant 'zo marvet,  
 War-dro hanter-kant vla noajet ;

Glac'haret-braz 'oa tud ar vro  
Pa oa klevet e oa maro.

A bep tu an dud a deue  
Da welet korf an den Doue,  
Ha, 'hed tri de, eo bet chomet  
Hep gallout bean douaret.

Sant Ervoan a fellaz mervel  
En Kervarzin, tost d'e gavel.  
An eskop en euz kemennet  
'Vije en Treger sebeliet.

Er miz mae e varvaz ar zant,  
Er blavez tri ha trizek kant,  
Dre e vurzudo ec'h eo bet  
Rak-tal en renk ar zent laket.

Otro zant Ervoan vinniget,  
Pa 'z oc'h gant Jezuz kurunet,  
Pedet evid-omp en Nenvo  
Ma neuilhfomp holl ho vertuio.

Ho 'pet d'imp-ni digant Doue  
E doujanz hag e garante,  
Ar c'hras d'e zerviji erfad  
Ha da gavout eur maro mad.

~~~~~

IMPRIMATUR :

Brioci, die 27^a maii 1898.

M. LE PROVOST, v. g.

TI MOULLEREZ SANT GWILHERM, BALI CHARNER, SANT-BRIEK